



# CHANSON AN AMOUROUSTED

Chilaouet, ma mignounet  
 Chanson an amourousted  
 A zo gant eur c'hernevad vit an deio composit.

Amourousted zo eur guer  
 Hag a zo dous a tener  
 Kaus he da vil nec'hamant hag ive da vil mizer

Pa vo an noz pe an de  
 Daou zen yaouank a goste  
 Kent ma c'houfeong doare he c'harivo ganthe.

Ar pot a goze brao  
 Hag ar plac'h a deuz foa.  
 Evit beza evurus mo fot nemet eun dra  
 Amourousted a ra d'he  
 Dimezi hep dale.

Pa vouint neve eureuget,  
 Vad a ra d'he nem velet,  
 Casi na ra met unan an ozac'h hag ar vreg.

Ken bras e ar garante  
 Ha ken bras an amitie  
 Neus an eil vit eguile hag en noz hag en de,  
 He ra deze lavaret  
 Pell zo cleymp beza dimeet.

Tudou youank, me ho ped,  
 Memes tra divoallet,  
 Liessoc'h zo dimezet vit a zo ezet.

Gwelet a meump a vejou  
 Kalz a chanchamanchou,  
 Er menajou e kaver beb sort ambarrassou.  
 Pa zeu en tieguezou  
 Kalz deuz a bouponou.

Unan a c'houlen crampoës  
 Hag eun all galetez.  
 Eun all zo en he gavel ho klask donet er mes.

Ar vreg zo dre an ti  
 Vel pa ve etourdi,  
 Na meus den evit klevet rezon vad ebet ganthi.  
 Fachet e deus e fried  
 Adieu d'an amourousted.

Tud yaouank, mar em c'hredet,  
 Lakait eves, diouallet,  
 C'houi an evurusan tud a zo voar ar bed.

C'houi za dre ar pardonioù  
 Ha dre an assambleou,  
 O tansal, o c'hebatal, o c'hevan takennou,  
 Eun den yaouank, mar gue fur  
 So parfet e blijadur.

Hag ar re zo dimezet  
 An darn vuyan meus goelet  
 A vanke eun dra benag dalc'hmad do evurusted.

Darn zo hag a laer ar yalc'h  
 An darn all e ya war varc'h  
 Re all a gar ar chopin, kent azvont me war walc'h  
 Tud yaouank, mar dimeet  
 Choaset tud fur ha parfet.

*Pa hi Lerer en eun eured a beller ajouti*

En eur dont da finissan  
 Souhaiti ferm a ran  
 Yec'het d'an daou zen neve, chans ha prosperite.

Me ho ped, kamaradet,  
 Vit eur fars ne fachet ket :  
 Permitted e badinal entre ar vignonnet.

Gras dimp da nem gavel c'hoas  
 Joaus evel biskoas  
 Ben an-den-ma pen eur bloa, ebars ar memes plas,  
 Ho trinka gant ho goeren  
 Da yec'het ar poupon.